

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

83. (MEURLARJFZ MERC'HED PLOUIDER)

Mar plich gant ar goumpagnunez
 Kleved kana eur zoun nevez
 a zo koumpozed er bloaz mân, Oie tralla la dralala;
 a zo ko'umpozetz er bloaz-man,
 ma na deu den da facha.

2. Ma c'houfen ne ved ket fached
 Kemend den zo oc'h va c'hlêved
 me gountfe dec'hu en dro goant, oie, bis
 a zo gread d'ar merc'hed yaouank.

3. Ar merc'hed mân a zo fier,
 m'ar deuz e parrez Plouider
 a zonch ne oar den o doare, oei,
 allaz, e c'houzeur betek re.

4. Ar merc'hed man a vale zkân
 na da vouillargez diveza
 o vont la bedi o mignouned, oie, bis,
 ua zont deiz vouillargez do goëled.

5. Kement a draou a bromettond
 mar lavaront tout e zechont
 kerkoulz an eil evel egile, oiet, bis
 ar memez tra a devije.

6. Gant an ti pa zint erruet
 Saludi an ozac'h o deveuz gred
 an ozac'h p'en deuz o goeled oei, bis
 dezo en deuz lavared.

7. Diavansit ta potred yaouank
 ma raimp eur pennad parland.
 Ni a antre eo eme unan, oie, bis
 Ia ma n'hor beveuz her c'hoân.

8. An ozac'h en deuz lavared
 ha prezt en deuz respocuntet
 mar pourchassit gouïn da eva oie, bis
 evit ar bouet ne gouzto netra.

9. Na mont ar botred yaouank
 pepini da gounta e arc'hant
 pepini da gounta e lod oie, bis
 da gerc'had guyn da ober zkod.

10. Ar merc'hed mân a yoa laouen o min
 pa glevent hano a gerc'had gwin
 hak a bourneme dre o zi, oietral. bis
 o pourchaz da zibri.

11. Ar verc'h a lavare de zad,
 va zad nak evit banneou mad,
 na c'hui va mam, na grit ive oie bis
 me o lakai en ho koele.

12. E tro unek heur da vont da hanter-noz
 pa zoa mêzo an daou goz,
 brema ni a rai e fenoz oiet, bis
 na pa zeo mêzo an daou goz.

13. Na dre ma zoant oll mêzo
 ma savas skandal entrezo,
 ma savas skandal entre i'oie, bis
 mar kommansiñont d'en em beuri.

14. Ar merc'het man en em glevaz
 Da gas ar goazed er meaz
 Da serri an nor ha de frenni oie, bis
 lezer ar goazet d'en em beuri.

15. Ne lavaran ket frankamant
 en em gânnje ar botred yaouank
 mez prest o deveuz doueted, oie bis
 nak e zoant tout traïset.

16. Ma n'ho c'heuz c'hoant gouzout ha klêvet
 gant piou ar zoun man koumpozet
 Ne hanvan den e jenerâl, oie, bis
 en em skrabat ma n'hec'h euz gâl.

vvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvv